

CHANSON NEVEZ

Var sujet an everezet

Breman pa hon dizourci, ha caout eun tam amzer,
Eman ecluet an eost ha laquet er sollier,
Eman deut barz ma speret da gomposi eur son,
War sujet ar graguez ha demeure ar c'hanton.
E var sujet ar graguez hac ar merc'hel yaouanc,
Pere a zo accoutumet da eva gwin-ardant,
Da ewa cafe ha gwin-gwen, tassadou gwin-ru,
Odivi, cognac ha liqueur hac ive cafe du.
Mes eus wreg accoutumet da eva odivi,
Obliget e vo e goas da zival deuz outi,
Da divoal outi alc'houez ar prez pehini man an arc'hant,
Evit empich anezi da gaout pa n'o choant,
Mez eur wreg en deuz adrez hac a rayou troyou,
Ha ray eun tol lagad da goaz, ha netra na vouïou,
En peb mare deuz ar zun he tigouez ar miliner
Dre eun devez mad he zoc'h deut ne man quet Yan er guer
Neuze e pignon barz er gamp, da gargat eur sahat,
Mar plich ganec'h miliner en cass din d'ar marhat,
Mez mo avertis miliner ha rog ma hefet deuz ma zi,
Da non pas laret guir ha leret ha ewo odivi.
Breman e vo cavet an tu da gaout eun tam arc'hant,
Ha pa vo cavet ar gomer e vezo gwin-ardant,
De bonjour deoc'h ma hommer pel zo meus quet o quelet,
Demp da glask pep a vanac'h da dori hon zec'h et.
En eur gontan ho doare ezont d'an hostiliri :
Petra momp ma hommer. coulz he dimp caout odivi.
Hema digasso grouez dimp ha nerz enn hon izili,
Me na gavan quet gwel boesson evit an odivi.
Mez dre forc d'an ewan e teuont da vewi
He commançont pilat ho bec ha na zounet hardi,
Neuze teui stang-ha-stang an demi-quart en dro,
Digass eta hostis, ne ket arc'hant ha vanquo.
Deuz quement den evo en ty ho devont conséquence,
Mez confusion en devo ann dud enn ho fresanc.
Mes laret e reont en trezo, da deuz guelel ho er,
A setu ase merc'hel, ha so leun ho foufer.
Mes pa vent eru leun a voac'h he teuont war ar ru,
Mes ne valeent quet plen, branta a reont d'an daou du,
Unan a lar quenavo poent he dimp mont d'ar guer,
Mes he benn-hal ha lavar me meus ma foar d'ober.
Me ha meus c'hoas da gaout saon, roussin hac hollen,
Hac ar butun zo manquet barz ma zabatieren,
Antrenn evelse bars enn ty da glasq zaon ha roussin,
Fouillan a ra he godel mez arc'hant neuз quet quin,
Mes eur vaouez hardi, pehini deus get bridirrit,
Ha pa ve achu he arc'hant he c'houlenn hen credit.

Mes merc'hel ar warc'hadourez dibot ne wen ambas,
Hac a respontas ractal dezi ebars ne faç :

C'houi heuz foetet ho arc'hant barz an hostiliri,
Ha breman ha peus an er da houlén treou enn credi :
Dont era er mæs deus an ty, gant eun er coleret,
Ann ini na ne quet hardi e vo ganti spontet.

Ober e rei tro ar foar, hep mez, evel-ze,
Couscoude he renq caout harp barz ma allo bale,
A nep confusion he bet a rai tro an dachen,
Mez en dezo hi zud o welet eur sor strouillen.

Ebarz ma vez fin dan de, na guemer na pen na troad,
Rac ha ben hi has d'ar gær, vo rei caout eur marc'h mad :
Ha pa fell dezi parlant eua deut a bill bras,
Passeit ar gallee hac ar latin, na war quet d'avantach

Brud e vo hoas deus ar merc'hed hac e ha d'ann evac'h douç
Ha ew woalc'h betec mont mew, mez ne reont quet a drouz,
Ar reze la vianna zo agreaploc'h da welet,
Rei a reant da gredi a wesen sœurezet.

Ar merc'hel yaouanc memez tra, ebarz eun hostiliri,
Gwerennon gante bars no dorn ha leua a odivi,
Me a meüs annaoudegez war buez ar merc'hed,
Kar bet hon bet, ewechou gante ho lipet.

Monet a ran da zisclerian ebarz en abrege,
Darn deus ar marvailhon ze c'hoarvec en Guene,
Me am boa choaset da vestrez eur plac'h capabl meurbed,
A ouar poquet da lost an tas, pa ve ganti carzet.

Eun deves ebars ar foar me hem boa hi rencontret,
He bars an hostiliri me am boa hi saluter,
Salud, bonjour plac'h yaouanc tensor ma amitie,
Contantamant ma speret, objet ma harantez

Ha dec'h ive den yaouanc, me ho salud ive,
Deut da guemer, ho lod ar foar, ma he ho polante,
Quemerit eur bannac'h liqueur, pe eur banac'h lagoutte
Quemerit deus ar sort eo ar guelan d'ho cout.

A boë eur pennat amzer hanaveent he sentiment,
Me laras dezi, ar guin-ardant zo eun dra excellent,
Ar banac'h quenta ha ewas ha rez diontan min fall,
Mez hoant he devoa a dare da gaont eun all.

Ha me ho houlén ive peb a vanac'h d'am zro,
Me na ma quet risq e'et car ma mestrez na baed,
Ma mestrezic ha blich d'hin, ha dreist an oll verc'h et,
Biquen enn he hompagnunez me nam bezo sec'h et.

Evet a sort a garfoc'h emezi ma servicher,
Me fenos e renquo em c'hondui d'ar guer :
Allas neuze he teuis da zonzal en memor, em speret,
Ha cetu aman eun den hac a zo goal dapet.

Nonobstant da guement-ze partial a vo ret,
Mez ma na ne quet wit querzet, hi douguen ne rin quet,
Mes pa voamp deut barz enn awel, hac avancet barz en hent,
Pa zispegen dionti he coeze war ann dachen.

Ar paraplui a zo rollet, hac hi zavancher zo a scleg,
 Hac he houef ha zo chomet a damo hed ann dreiz,
 Cetu claw bras ar plac'h paour, na gnomer na troad, na peññ
 Ha me zo nec'het bras gant ma mestrez stroullenn.
 Ya claw bras eo ma mestrez, ne quet ewit, querset,
 Ret he din hi lezal war ar n'heñt, ha hi laquat da gousquet,
 Neuse me zeti d'ar guer hac hi lezas enno,
 Pa hi devo cousquet awalc'h, marteze hi difano.

Guelloc'h we d'ar sort merc'het en plac ho farapluion,
 Caout kiri goloet pa heñt l'a foarion
 Ha neuze d'ha vianna, ma ne venget wit querset.
 He vefent tolet he bars, hac hi vefent chareet.
 Ho hass he vefet propoc'h car ne velen ket goelet,
 Ha quit he vefe ho d'lat da vezan habimet.
 Ha comoloc'h eo ive d'ar re ve deus brenn,
 Car pignat ebars ar har n'enz ket quement d'boent.
 Ho pedi ha ran merc'het dre ma zon d'oc'h mignon.
 Da vezan moderet pa ewet boessson,
 Car enn eur ewan re, a offancer Dode
 Distrujan a ret ho corf, ha lahan ho ine.

Evidon me d'ho quelen me zo ive bambocher,
 Demeus ha barez Gourin, hac he chom en Kerguichet.
 Me a zo eur paour qez den, gant ann ewalc'h dihochet,
 Mez ret ew d'hin lezet ma venq'er bla-man gant ann merc'het.
 Hac eur vicher fall ew ive evit destum madou.
 Ret he dint mont er bla-man da vare'hadour coellou.
 Entre ar pezh a vo uzet hac ar pezh a vo roguet,
 Marteze he teui ha benn, da honnit ma zam boet.



MARI BEG A ROG A FRI PARTOUT

Var ton ; Son an dancou.

Mar od'h eus c'hoant, va mignonet, d'a anveont eur vreg rog,
 Me o kunduo oa guerfet, dirag Mari beg a rog,
 Bemde var dro eun heur anter e cluc'h var treujou e dor,
 Kerkent teodou pig ar c'hartier gant enr skaoun pe enr gador.
 A zired oll en e c'hever, an audianç so dtgor.

Var barlen Mari o veler pes fouldren assied,
Var bni e cont pep kommer kement e deus iventet ;
Klêvet a rên pep den lipous a ya bemde d'ar c'hafe,
Pet plac'h a deus tri amoureux, ha pet a zo stadenne ;
Pet ozac'h a zo mewier, ha pet a bill o grague.

Mari beg arog a gommand var ar c'honseil divragou,
Eb kaout an nebeutia damant e tigor franç e guenou,
Pa ne deus var e bizach na moustachou na baour.
E red dêi kaout an'avantaj da zikrial tud ar vro.
Guêvier, sofoni, kos langach, flud a bep kalite zo.

Mari beg arog eo titret vel an huella noblañ,
Dommañ e n'en d'ê ket pried d'eun den pinvidik a Franç ;
I é princes an diegi, comteas a liboudennou,
I é dukes al loustoni, marquises ar strakellou,
Gouarneres ar jolôri, baronez ar pillou.

Kerken a ma ve imbandet daou den yaouank da zimi,
Eve, d'al lun vintin, galvet e c'honseil bras gant Mari
Ped Konseiller en gueleden a boangn gant e vouton bër
Evit klask ar guellan moyen da derri pront an affer ;
Ar plac'h a gar ar jigoden, pe ar goas a ve mêvier.

Ar re voassa da zikrial an tud a ya en fortun
A zo, evi an ordinal, merc'hed chommet eb nikun,
Merc'hed kes chommet da goza eb tapout eun tamik goas,
Haç a gommanç bréma facha, dre ma ne deu den do choas.
Kouskoude an ini gossa n'ê ket tri-uguent vloa c'hoas.

Kerkent ha ma vel eun eured o tont var zu an Ilis
Mari beg arog a zired en manchou lous en invis,
Evel eur vioc'h ha vreskin e c'haloup abiou ar ru,
Holà ! Catel, Jeannet, Perrini Soas, Mac'harid, deut diens-tu.
Cetu aman eured Martin, deut dremen ar rêvu,

Va c'hommer sellit eus hounes, dislivet e davancher
E c'horneten zo eb ampes, hag e gueleden re vër ;
Ho ! sellit-ta eus an den-man, peguen striz é e vragou,
E dog so brassoc'h evitan ; ha kals re hir e vouton,
Eur chimizeten so gantan var eur rochet en pillou ;

Pa ve eur vreg kes guilloudet, divar e buguel kenta,
E c'houlén Mari estonet : petra, nao mis so dija ?
Me gave din voa an eured d'al lun goude pardon Pôl.
Ha pask n'ê ket c'hoos erruet, allon ! grêd o deus an tol
Eb n'o deveus va c'hemennet, an dra ze gavan drol.

Pa gleô kloc'h Ilis ar barrous o c'hervel d'eun vadiant
Mari gant eun troad eb botes, a erru arog ar chant ;
Mæs, dre valheur n'eus ket ezom demeus eur voues ken raoullet
Da zikour kan Te Deum evit an nêve ganet,
Gant e c'hommerezet e chom e kichen dor ar vèret.

En ty intanvez ar Goffic, en Lanhuan